

Kourantiniq ~

En Rumengol 'zo eur plac'hiq a zo fur ha
 Koant 'vel eun aelig, a zo fur ha koant 'vel eun aelig.

1. En Rumengol 'zo eur plac'hiq
 A zo fur ha koant 'vel eun aelig.
2. Fur e ha koant 'vel eun aelig
 Hag he'h ano 'zo Kourantiniq.
3. Kourantiniq 'ouele dourek
 'Paerz en bord an aod, war eur c'harreg.
4. - Ma zad 'zo beuhet er mor don
 O skein e listri en re 'r Saozon.
5. Hag ar c'helon pen arruas,
 Kaloniq ma mamm baour a rannas.
6. Petra 'rim-me war an donar
 N' em eus na tad, na mamm, na kar na far.
7. Ma mamm a lare din bepred
 Karet ar Weri'hez vinniget.
8. Karet ar Weri'hez a Rumengol
 Ita ned afen james da goll.
9. Gweri'hez vinniget, emezi,
 Me garje mont d'ho Kwelet d'ho ti.
10. Ha gant ma feun blev melen
 Me raje dai'h eur gurumenn.
11. Grizilhonet gant ma daeron
 Ha tokedon kaer deus ar parkon.
12. Mont 'na Kourantiniq barz en hent
 Hag e barz 'in he dorn, eur gurumenn.

13. En Rumengol pen e arriet
Kichen treid ar Weri'ez e stonet
14. - Gweri'ez rinniget, emchi,
Me 'garze' dont da vervel d'ho ti.
15. An Weri'ez outi a gouzas
Hag evel-benn dehi a laras:
16. - Da ene ha da galon bavor
Zo naet ha pur evel an aour
17. Hag ar bed zo ken dirollet
Ma 'krombes' ens, te 've kollet
18. N'oa ket he gir ferrachuet
Kichen treid ar Weri'ez e' h e marvet.

Kanet e miz Kerzu 1953 gant Mari-Jozef Chapalan,
Ehon Morvan, o krom e Kergilawen, P'lonzeg.

Ned eo kement-mañ nemet barzhoneg ar Skourr, e
Telenn Rumengol, p. 76, Plac'hik Eussa. An
destenn amañ en em ziskoneg berract, adstummet
a- wek'ou ha bravoc'h a gar din. Adskrivet em
ens Kan Mari-Jozef Chapalan erit diskoneg p'laos
e ho luv son en evor an dud.

